


VA ANO AR PUBLIKAN (1/2)

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg



VA ANO AR PUBLIKAN (2/2)

Diskan : **O Maze deus d'am heul,
Sao alese ha lez pép tra :
O Maze!
Deut on 'vid ar paourra !**

- | | |
|---|---|
| 1. Va ano eo ar publikan
A C'halile !
Em buez n'oa ket plas d'ar c'han
N'oan ket prizet gand Doue ! | 4. Ha me raktal war-zao da vond
Beteg ennañ,
Ha d'e bedi dioustu da zond
Da zrebi lein beteg du-mañ. |
| 2. Maltouter oan en eur bureo
Ha gwelet fall.
Ni n'om med laeron, d'o meno,
Disprizet gand an oll dud all. | 5. Diskibien Jezuz 'm-oa pedet
Tro-dro d'an daol;
Mignoned din, publikaned
A oa ive ganeom ouz taol. |
| 3. Ha Jezuz 'zo chomet a-zav
Evidon-me
Hag ouzin 'neus sellet gand joa:
"Va breur Maze, sao alese !" | 6. Ar Skribed o sellet gand kas
N'oant ket 'n o bleud
Ha Jezuz dezo 'lavaras :
"Vid ar beherien eo on deut." |

MON NOM C'EST LE "PUBLICAIN"

*R: O Matthieu, suis-moi,
Lève-toi et laisse tout :
O Matthieu !
Je suis venu pour le plus pauvre !*

- | | |
|---|---|
| 1. Mon nom, c'est le Publicain
De Galilée !
Dans ma vie, pas de place pour le chant,
Car je ne comptais pas pour Dieu. | 4. Je me mis, tout de suite debout
Pour aller vers Lui
Et je L'invitai aussitôt
A venir prendre son repas chez moi. |
| 2. Dans le bureau, je percevais les impôts
Et j'étais mal vu.
D'après eux, nous ne sommes que des voleurs,
Tout le monde nous méprise. | 5. J'avais invité, autour de la table,
Les disciples de Jésus ;
Des amis à moi, publicains,
Étaient aussi à table avec nous. |
| 3. Et Jésus s'est arrêté
Pour moi.
Avec joie, Il m'a regardé :
"Mon frère Matthieu, lève-toi !" | 6. Les Scribes, au regard agressif,
N'étaient pas contents
Et Jésus leur dit :
"C'est pour les pécheurs que je suis venu". |